

Kaneh ebarz Foar Santar C'horair Keraez
13 a viz meur 1934.

CHANSON NEVEZ

var sujet daou zen yaouanc

pere en em gare gant fidelite

Var un ton nevez



Abailard, Horaç, Tibul, Catul, Ovid, Orphe,
C'hui, modelou sincer eus ar goir amitie,
Laquit oll em guenou ho preposiou charmant,
Inspirat em speret va c'halon languissant.

Me ya da ziscleria va buez maleurus :
Tostait d'e c'hlevet, tud yaouanc eurius ;
Deut oll da bartaji va c'hlac'har, va c'hlemou,
Ha furmit guenen-me ur feunteun a zaelou.

En escopti Treguer e voa eur plac'h charmant,
Hac e doa ravisset calon meur a zen yaouanc :
Demeus an oll merc'hed a meus darempredet,
Hy eo dre breferanc dreist oll a meus caret.

Mæs he sellou quen douc, hac e c'homzou d'eread,
He furnez, he doucder, hac he bolontez vad
A elumas em c'halon flammou an amourouset ;
Bep instant, va speret voa ganti occupet.

Var favennou yaouanc, gant beg ur ganivet,
Tro var dro, hon hano lies am eus scrifet.
C'hui, plantennou eurus, a gresco nos ha de ;
Ni garfe eveldoc'h e cresqfe hon amitie.

Nemeus mui pligeadur nemet arru e vez
An deiz d'allout guelec'hoat objet va c'harantez :
Ennan ma residanc dezir va fantasi,
A guement zo er bed-man, ne garan nemed-hi.

Mæs, allas ! torret eo chaden ar bligeadur ;
Troet va flaneden e flammou dinatur :
Bremen, a dra certain, vezo ret e c'huitat !
Mancout a ra va c'halon, sclerder d'am daoulagad.

Doue oll-buissant ! roit din assistanc,
Vit m'allin d'am maestres mont d'annoc'ho ar setanc,
Me a ya c'hoas ur veich bete ty va maestres,
Gant ur galon carguet, leon a dristidiguez.

Cetu me vis a vis d'am guir muya caret,
Princes an amitie, model an oll merc'hed,
Va oll gontantamant, oll joa eus va speret,
Hi a garg va c'halon bep heur ha bep moumet.

Neus netra endro din na repet d'am memor :
An amitie fidel a zo dreist pep seurt tenzor,
Mæs bremen a redoubl oll glac'har va speret ;
N'allan quiet comz outi, quement e zon mantret.

Abondanc va daelou a deu d'am daoulagad ;
Carguet eo va c'halon demeus a buanad.
Petra zo, va mignon, ma zoc'h quen disolet ?
Eus hoc'h affliction, contit d'in ar sujet.

Queun meus, a greiz calon, o velet ho tourmant ;
Me garfe ve em galloud rei d'eoc'h soulageamant.
D'am annui, d'am glac'har, c'hui a zo calz quiriec ;
Abars varc'hoas vintin, me a vo partiet.

Possubl ve, va Doue, e ve guir quemense,
E vec'h u deut aman evit quemer ho conge !
Ne deo nemet re guir ; partiel a vo red ;
Arru eo va c'herent da brononc va arret.

A ça, va servicher, e zit-ta d'am c'huitat ?
Penaus a rin bremen ? houman zo calonad !
Va oll santimanchoz zo ganec'h gounezet,
Me a vo maleurus, me vemp dispartiet.

Arretit ho laelou, n'en em desolit quiet :
Bars ur mis, d'ar pella, me zeui c'hoaz d'ho quelet.
Quemerit confianç ha chomit en ho peoc'h :
C'hui eo va oll esperanc ; ne garan nemedoc'h.

Allas ! va servicher, n'en deo quiet hep resoun
E velit ho maestres e quer bras affliction :
Pa po cenchel a vro, c'hui cencho a lesen ;
Ur vaestres all o po, c'hui am dilezo a gren.

Ha pa ve laquet etrezomp-ni hon daou
Quement demeus a hent vel zo ac'han d'an evou,
Credit en assuranc, biquen n'ho tilezan :
Biquen maestres n'am ho nemed an hini bremen.

Birviquen n'ancourzan ar pez a zo touet.
C'hui c'heus sonj, va maestres, a voeliou Nedelec ?
Em boa aoun em tilesac'h en deiz voa o tonet
An hini na zezire nemed beza ho pried.

Ha neuze, va maestres, evit va c'honsoli,
Gant eun ar quen countant e teusac'h da bropos din
Monet d'an ilis vras, eno dirac Doue,
Da brononc ar sermant eus a fidelite.

Etre peder ha pemp heur, ar meurs dabardae,
En em rentzomp en ilis, an eil gant egile.
Ha pa voamp daoulinet vis a vis d'an auter,
E laquezoc'h ho torn en hini o servicher.

Gant ur galon sincer, e faç ar Sacramant,
E teuzomp-ni hon daou da brononc ar sermant
D'en em garout fidel bete fin hor bue,
Biquen nemed ar maro sur n'hon dispartise.

Ha p'am be da veva quenlies a vlaves
Evel zo a zeliem ebars en ur forest,
Birviquen n'ancouan va doussic Yan-Yvon,
Pligeadur va spered, rouanez va c'halon.

Eus a greiz va ene me ofr d'eoc'h, va maestres,
Sacrific va spered ha va goad assambles :
Mar trahissan biquen va oll bromessaou,
Doue am punisso a bep seurt malerieu.

Quemerit, va maestres, evit merq ar bromesse,
Diou galon peur-dreuzet gant ar memes cleze :
Var ar memes imach e cavot dessinet
Diou durzunel yaouanc en em garre parfet.

Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon ;
Na ellan quiet credi em lesfac'h en abandon :
Assurit d'in me c'hoas, var ho quer a benor,
Biquen na trahissot ur galon d'eoc'h digor.

Finissomp, va mignon, tost eo d'an anter-nos,
Arru eo am amzer, poent e deomp repos.
Adieu, va maestres ker, quen a vo ar c'hentan ;
Ha dec'h, va servicher, ha retornit buhan.

Aben pemzec de goude, e retornis d'e quelet
Gant cals demeus a joa ; na zanten quiet querzet ;
N'en quiet buhan avoalc'h, hervez m'am boa c'hoant,
Me zante e lampe va c'halon triumphant.

Pa voan arru er plac en dezir va bolontez,
E quichen va maestres evit clevet he doare,
P'e c'honsideris ervad e chomis estonet,
O tonet da gompren penaus e voa cenchel.

Evit parlant dezi, hi na responte quet :
 Ur flem sco em c'halon pe guelis ker mantret.
 An douar arozet gant daelou he daoulagad
 A voa eun test assuret demeus he c'halonad.
 Ah ! m'am c'herit-u c'hoas gant guir fidelite,
 Disclariet entrezomp breman ar virione ;
 Lavarit d'in ar sujet eus ho melanconi :
 Quell eo guenen mervel eguet rei d'eoc'h anvi.
 Allas ! va servicher, ni a vo separet :
 Da zimezi d'un all, me a zo contraignet ;
 Henvoas zo lavaret e vijen goulennet ;
 Se a zo quiriec d'in ma zon quer glac'har.
 C'hui, Mari, va maestres, am lez en abandon,
 Goude ho peza laquet rouanes em c'halon !
 Hounez eo ar recompanç e meus-me militet
 Goude beza o caret re dreist an oll merc'hed.
 Me ho ped, va mignon, na reprochit quet din
 E ve va dessin breman dont doc'h abandoni.
 Possubl ve em accusac'h a infidelite !
 Nemeus discuezet dec'h nemet re garante.
 Gout ouzoc'h coulz ha me pegument ho caran ;
 C'hui zo caus d'an tourmant pini a anduran :
 Va oll garantez voa gounezet oll ganec'h ;
 Va brassa pligeador voa oboissa dec'h.
 Brepred on n'em rentet gant guir fidelite
 Bars un andret fixet herves ho polonte.
 M'am bize bet evidoc'h nebeutoc'h carante,
 M'em bize ho quitet hep nep difficulte.
 Me garje na vizemp biquen en em velet,
 Pa zeo red d'eomp hon daou beza dispartiet :
 Ma vize arru ar poent da veza dimezet,
 Credit penaus biquen d'am zad n'am bize pleguet.
 Goude ar bligeador, teu an desolation :
 N'oufac'h mui eguedon caout scurt affliction,
 Eguet d'am separi eus desir va c'halon :
 C'hui voa va servicher, va oll gonsolation.
 Ebars va flanden, o pebes chenchamant !
 Houman zo evidon ur voalen a dourmant !
 Va amzer bremanet am chagrin, va maestres,
 Pa deu din da gompren bars em pligeadarez.
 Sonch oc'h eus a vis ebreul, ar zul goude creiz de
 E rezoc'h d'in ar gach demeus oc'h amitie :
 Nan, biscoas va spered ne voa bet quen joais ;
 Henvel voa hon bonheur d'ar sperejou eurus.
 Mæs breman è mantret gant an oll dourmanchau.
 Me grede parfed mad e vizemp priejou :
 Un esperanç quen douç a rejouisse va c'halon,
 Me sonje na vize biquen separation.
 Mæs achu è va bonheur hac achu vit biquen ;
 N'en em zissipit quet evel ma r'ar glizen,
 A zisparis en ær pa deu an eol da zével,
 Pe evel un dornat pell quintet gant an avel.
 Petra a servich d'in beza laquet er bed-man ?
 Beza da souffr evidoc'h, ô va maestres ! breman,
 Quen hir ha va buez e pado va glac'har.
 Me garre beza breman e calon an douar !
 Adieu a laran dec'h quent eguet partia ;
 Me a parlant ouzoc'h evit ar veich diveza :
 Biquen e bars er vro-man n'ho quelan, va maestres,
 Bel eurusoc'h egedon... Adieu evit jamæs !
 M'ho ped, va servicher, ouzin na fachit quet :
 Pa golfen va buez, me n'oc'h ancouain quet.
 Birviquen n'ho quelin hep monet d'ho betec ;
 Gant calz a gonfianç, deut bepred d'am guelet.
 Bet persuadet mad ho po consolation :
 C'hui è am eus choaset evit pried d'am c'halon.
 Credit, en assuranc, biquen n'ho tilezan ;
 Jamæs maestres n'am ho nemed an hini breman.

Ar silanç, ar glac'har ras fin d'hor preposiou.
 Hor moues a voa mouget gant an buanadou ;
 Demeus va daoulagad, a rede an daelou
 Evel ar voasou o tiruill demeus ar montagnou.
 N'oufac'h biquen songeal quer bras desolation !
 Me sonje voa plantet ur c'hleze em c'halon ;
 Carguet a zizesper, na c'houlen nemed ar c'hraç
 Ar maro ar prompta, an termen va disgraç
 Me voa bet pemzec dez, ya, ha pemzec noz
 Hep ma ellis biscoas quemer en tout repos :
 Pa vizen em guele, en dessin da gousquet,
 Gant ar spont hac ar form e vizen diunet.
 Bepred ar memæs œuvre a deveu incontinant
 Da represanti d'in an objet eus va zourmant
 En etat m'e guelis, pa bartizomp hon daou,
 Ar flem, an dizesper ebars en hor c'halonou.
 Lies e receven eus he c'helou goude,
 Dre voyen liseriou carguet a garante,
 Pere am c'honsole epad va hir absanç,
 O tont da jouissa eus joa an esperanç.
 Cetu dija nao mis na meus guelet va maestres ;
 Arru eo guenen liser digant he c'honsortes.
 O pebes quelou trist zo ebars annoncet !
 A dall al lignen guenta e meus en remerquet.
 O planeden barbar, leun a velanconi,
 Na scuisset-u quet c'hoas ous va fersecuti !
 Pet guech e varvin-me quent mervel en effet ?
 Eprouvi ho coler, ô petra meus me grêt ?
 Den ingrat ha perfid, calet ha dinatur,
 Maro eo da væstres bars en displigeador !
 N'ellis pelloc'h poursu ar c'helou desolant,
 Coll a ris ar guelet, an nerz, ar santimant.
 Nemeus mui a c'halloud nemet evit gouela ;
 Echu è va oll joyaou, allas ! bars er bed-ma :
 Nemeus, evit partach, da chom var an douar,
 Nemed hirvoud, tourmant, melanconi ha glac'har.
 O roue an evou, maestr an Æles eurus !
 N'oc'h eus quet va c'hrouet evit beza maleürus.
 Disquennit bete d'in sell lagad a druez,
 Pe laquit prontamant un termen d'am buez.
 Ar spaç a drizec mis oun bet ous he c'henti,
 Ne voan em pligeador nemed pa vezen ganti :
 Hi a voa an objet eus va oll ambition ;
 Quen ne allan cavet nemed affliction.
 C'hoas e viran em pres he lizer diveza
 A scrifas hi d'in-me quent quitat ar bed-ma ;
 Ha pa ven va-unan, lies en digoran ;
 Pa goumançan d'e len, gant daelou e glebian.
 Gouelomp oll, tud yaouanc, gouelomp oll assambles !
 Biscoas plac'h na zeus bet fideloc'h eguet bounes :
 Birviquen na zortio certain demeus va speret ;
 Bete fin va buez, me e c'haro bepred.
 Canit, rossignol, gant ho mouez triumphant,
 Disquezit d'ar c'hoajou hano va maestres coant
 D'ar mintin, pa bignit etrezec an èvo,
 Vijilant ha fidel, repetit he hano.
 Trist e quichen he bez e laçan va c'harante ;
 Ennan a repos breman objet va amitie.
 Doue, evit recompanç eus he c'harante fidel,
 En deus accordet dezi ar joayou etemel.
 Ha pa deuyo an ancou gant e faç horrerus
 Da lacat un termen d'am buez maleürus,
 Eus ar memes moumed ma vo va goad o repos
 Me jouisso ganti eus joa ar Barados.

FIN